

L. F. V. V.
et al.

146381

K AIEROU
ENVREURIEZ
≡ AR BREZONEG
ESKOPTI KEMPER HA LEON



KAIER I
KERZU 1969

Pourquoi ces "cahiers", dont voici le n° 1 ?

Pour permettre de grouper tout un ensemble de travaux sur la langue bretonne et, en particulier, son application à la liturgie rénovée.

Pourquoi ce titre de "Kenvreuriez ar Brezoneg" ?

Nous le ressuscitons, d'abord en souvenir de l'association de ce nom qui, au Grand Séminaire de Quimper, rassemblait les séminaristes attachés à la langue bretonne, pour l'apprendre ou pour s'y perfectionner.

C'est aussi en hommage à M. le chanoine LE STER, décédé le 26 août dernier, qui fut le président-fondateur de la même "Kenvreuriez" étendue à tout le clergé du diocèse. Fondée le 23 juillet 1942, avec les vifs encouragements de Mgr Duparc, son but était - et reste - de grouper "tous les prêtres désireux de travailler au maintien et au développement de la langue et des traditions bretonnes sur les différents terrains où leur influence peut s'exercer."

Aujourd'hui, les perspectives sont autres qu'il y a trente ans. Mais nous voulons travailler dans le même esprit. Bible et Liturgie sont, en priorité, les nourritures que les prêtres et les catholiques bretonnants attendent qu'on mette à leur portée. Ce seront les rubriques principales de nos "Kaierou", sans en exclure d'autres plus variées.

La formulation juste et exacte des textes bibliques et liturgiques en un bon breton est une oeuvre délicate et passionnante. D'autres ouvriers s'y emploient dans les diocèses voisins. L'ouvrage des uns et des autres, s'enrichissant mutuellement, préparera le terrain à une version commune.

Pierre-Jean Nédélec (aumônier à Ker-Anna,
29 S Quimper)

Souscription.

Sans périodicité fixe, ni nombre de pages déterminé, on peut souscrire à 500 pages, du présent format 15,5 x 21, en versant 8 F. au C.C.P. 193.17 NANTES (Chanoine Nédélec).

TAOLENN AR HENTA KAIER "KENVREURIEZ AR BREZONEG"

Lodenn genta.- <u>PEDENNOU HA LIDOU AN OVERENN ("Ordo Missae"1969)</u>	1-22
1.- Urz nevez an Overenn, heb Prefasou ha Pedennou-Meur	1-14
2.- Prefas an Nedeleg hag an Epifani	15
3.- Eilved Pedenn-veur	16-18
4.- Teirved Pedenn-veur	19-22

Eil Lodenn.- AR SKRITUR ZAKR EN OVERENN, Bloavez B
.....

Sulvez kenta an Azvent	1-4
Eil Sulvez an Azvent	5-7
D'an Nedeleg: Overenn hanter-noz	9-11
- - goulou-deiz	12-13
- - an deiz	14-16

AMIS LECTEURS

CE QUE NOUS VOUS APPORTONS. - Nos habits ne sont pas riches, mais nous tâcherons de les tenir propres et faciles.

a/ sur beau papier blanc, voici les textes à usage liturgique, approuvés "ad experimentum" - aotreet da arnod -, que nous allons très vite faire paraître avec plusieurs semaines d'avance. Ces textes auront beau avoir été soigneusement travaillés, ils seront encore perfectibles.

b/ sur papier plus ordinaire, des commentaires et des annotations, des documents et des études, qui achèveront de faire de ces "Kaierou" un instrument d'enrichissement et de culture personnelle.

Ces travaux seront signés de leurs auteurs et n'engageront que leur responsabilité. S'ils suscitent des réflexions et des réponses, tant mieux!

CE QUE VOUS NOUS APPORTEREZ

Nous savons trop bien le peu de temps dont disposent beaucoup d'entre vous, et même l'intérêt affaibli qu'ils portent encore à leur langue. Ils pourront, du moins, suivre nos travaux, y réchauffer leur amour pour le breton, nous soutenir de leur sympathie et, tout de même, de temps à autre, communiquer leurs réflexions.

Mais, si nous sommes deux cents (pure hypothèse, pour l'instant) il faut et il suffit que nous nous trouvions une ou deux douzaines à coopérer da façon plus active.

Deoh oll, Nedeleg laouen ha bloavez mad !

Per Yann Nedeleg.

P E D E N N O U H A L I D O U

A N O V E R E N N

Kenvreuriez ar Brezoneg Eskopti Kemper ha Leon, 1969.

Troidigez vrezonég aotreet da arnod
a-berz an Aotrou Fr. Barbu, Eskob Kemper ha Leon,
evid an Eskopti.

Kemper, d'an 12 a viz kerzu 1969,
gand gouel Sant Kaourantin.

•
+ V. FAVE, eskob-skoazeller.

3. Lid a binijenn.

Ar beleg: "Va breudeur, pa'z om oll peherien, taolom eur zell ennom on-unan,
..... ha goulennom pardon, evid beza e stad vad da lida an overenn."

Eur pennadig e chomer sioul.

Da houde, e kemerer unan euz an doareou-mañ:

- a) Oll a-unan: "Me 'anzav dirag Doue oll-halloudeg, ha dirazoh, va breudeur,
..... am eus pehet braz dre zoñj, dre gomz, dre ober ha dre jom
heb ober. Rag-se e houlennan digand ar Werhez Vari, an Elez
hag an oll Zent, ha diganeoh, va breudeur, pedi Doue evidon.

Ar beleg: "Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom, pardoni
..... deom or pehejou, ha kas ahanom d'ar vuez peurbaduz.

R/ Amen.

- b) Ar beleg: Ho pet truez ouzom, Aotrou Doue.
..... R/ Rag pehet on eus en ho keñver.

Ar beleg: Diskouezit deom ho madelez.

..... R/ Ha roit deom ho silvidigez.

Ar beleg: Plijet gand Doue oll-halloudeg... (evel uhellouh).

- c) Ar beleg, pe eur haner, a ra eur bedenn-letani, gand ar homzou merket
amañ pe re all dem-heñvel. Beb taol, ar bobl a ziskan eur wech hebkén:

1. Salver Jezuz, bet digaset war an douar evid or zilvidigez:

Aotrou Doue, ho pet truez.- R/ Aotrou Doue, ho pet truez.

2. C'hwi hag a zo deut er bed-mañ evid golver ar beherien:
Aotrou Krist, ho pet truez.- R/ Aotrou Krist, ho pet truez.

3. C'hwi hag a zo bremañ e gloar an Tad evid tenna warnom e vadelez:
Aotrou Doue, ho pet truez.- R/ Aotrou Doue, ho pet truez.

Ar beleg: "Plijet gand Doue oll-halloudeg... (evel uhellouh).
.....

4. KYRIE ELEISON a lavarar bremañ, nemed implijet e vefe bet an doare diweza
evid al lid a binijenn. N'eus nemed eur wech da respont.

Aotrou Doue, ho pet truez.- R/ Aotrou Doue, ho pet truez.
Aotrou Krist, ho pet truez.- R/ Aotrou Krist, ho pet truez.
Aotrou Doue, ho pet truez.- R/ Aotrou Doue, ho pet truez.

(Ma n'eus ket da lavared ar Gloria, e reer dioustu ar bedenn.)

5. GLORIA, war gan pe lavaret plên, gand an oll penn-da-benn pe a beb eil:

1. Gloar da Zoue e barr an neñvou ! 2. Ha peoh war an douar d'an dud
a blij dezañ.- 3. Bezit meulet, bezit trugarekeet, bezit adoret.- 4. Bezit enore
bezit benniget evid ho kloar dispar.- 5. Aotrou Doue, Roue an neñv, Doue an Tad
oll-halloudeg.- 6. Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz.- 7. Aotrou ha Doue,
Oan Doue, Mab an Tad.- 8. C'hwi hag a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom.-
9. C'hwi hag a zilam pehed ar bed, digemerit galv or pedenn.- 10. C'hwi azezet
en tu deou d'an Tad, ho pet truez ouzom.- 11. Rag c'hwi hebkén a zo santel.-
12. C'hwi hebkén eo an Aotrou.- 13. C'hwi hebkén eo an Uhel-meurbed, Salver
Jezuz.- 14. Gand ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen.

6. KEMPEDENN - Gand ar bedenn-mañ e vez echu lidou an digor.

Ar beleg n'e-neus ket kén da zaludi an dud fidel, med o alïa
a ra da unani o fedenn gand e hini, en eur lavared:

"Pedom Doue"... pe: "Pedom oll a-unan"... pe c'hoaz: "Pedom"...

Da echui ar bedenn, e lavaro peurliesä:

"Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

R/ Amen.

pe, ma vez ano euz Or Zalver e dibenn ar bedenn:

"Eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz..."

pe, ma vez grêt ar bedenn ouz Or Zalver e-unan:

"C'hwi (hag a zo) on Doue beo gand an Tad hag ar Spered Glan, a oll..."

Eilved Rann.- LID AR GOMZ A-BERZ DOUE (1)

.....

7. Evid selaou komzou Doue, an dud a azez. Peb lennadenn a zigoro evelhenn:

"Pennad euz... (levr-mañ-levr, pe lizer eun abostol)"

Pa lavar al lenner, en eur echui e bennad: "Setu komzou Doue",
an dud a respont : "Bennoz da Zoue".

(1) Bez' e heller lavared ive: Lid ar Skritur Zakr, pe: Lid ar Gomz santel.

8. Ar Salm a zeu war-lerh al lennadenn genta: ar salmer (pe eul laz-kana) a gan pe a lavar plên ar gwerzadou, ha goude pep hini an oll a gemer eun diskan.
9. Pa'z eus eun eil lennadenn araog an Aviel, al lenner a ra anezi evel eben.
10. An dud a zav evid ar zalud d'an Aviel, gand an Alleluia pe eur han all.
11. Epad ar zalud d'an Aviel, ar beleg a lak ezañs da vogedi, ma'z eo da veza implijet. An avieler - pa'z eus unan - a zeu dirazañ hag a lavar stouet:
"Ho pennoz din, (mar plij), va zad."
Ar beleg a respont: "Ra vo Doue en ho kalon ha war ho muzellou,
deoh da embann e Aviel santel: en ano an Tad..."
Ma n'eus ket a avieler, ar beleg, stouet dirag an aoter, a bed a vouez izel:
"Lakit glan va halon ha va muzellou, Doue oll-halloudeg,
ma vin e stad da embann hoh Aviel santel."
12. An Aviel a vez kanet pe lennet en doare kustum:
"An Aotrou Doue ganeoh.- R/. Ha gand ho spered.
"Pennad euz an Aviel santel hervez sant N...-R/. Gloar deoh-hwi, Aotrou Krist.
(Da heul ar homzou-mañ, e ra ar beleg (pe an avieler) sin ar gro
war al levr ha warnañ e-unan: war e dal, e henou hag e vruched.
13. Echu ar pennad Aviel, e lavar an avieler: "Setu komzou Doue".
Hag e responter: "Meuleudi deoh, Aotrou Krist, meuleudi deoh da viken!"
pe: "Meuleudi da Jezuz Krist, en e Aviel santel !"
A vouez izel, en eur bokad d'al levr, ar beleg, pe an avieler a lavar:
"Dre gomzou an Aviel, ra vo lamet or pehejou."
14. An dud a azez evid selaou ar brezegenn.

15. AR GREDO a lavarer er zao. Lies doare 'zo d'he displega, pe gand an oll penn-da-benn, pe gand eul lenner a beb eil gand ar bobl, pe c'hoaz en eur lakad eun diskan war-lerh peb rann euz ar Gredo, ar rannou-se o veza displeget gand eul lenner pe gand daou lenner. (1)

a. (Doue an Tad) Me 'gred en eun Doue hebkén,
an Tad oll-halloudeg, krouer an neñv hag an douar,
kement a weler ha kement na weler ket. - - - - (Diskan)

b. (ar Mab evel Doue)
Hag en eun Aotrou hebkén, Jezuz Krist, Mab unganet da Zoue:
euz an Tad eo ganet araog an oll gantvejou,
Doue euz Doue, sklerijenn euz sklerijenn, Doue gwirion euz Doue gwirion;
ganet, ha n'eo ket grêt, kennatur gand an Tad, ha drezañ
eo bet grêt peb tra. (Diskan)

c. (Ar Mab evel Salver an dud)
Evidom-ni an dud, hag evid or zilvidigez, eo bet diskennet euz an neñv;
ha korv e-neus kemeret, dre nerz ar Spered Santel,
euz ar Werhez Vari, ha dén eo deut da veza.
Evidom ivez staget ouz ar groaz, e-neus gouzañvet dindan Pons Pilat,
hag er béz eo bet laket.
D'an trede deiz eo savet a varo da veo, hervez ar Skritur Zakr.
Pignet d'an neñv, emañ azezet en tu deou d'an Tad;
hag adarre e teuo gand gloar, da varn ar re veo hag ar re varo,
ha ne vo fin ebéd d'e rouantelez. - - - - - (Diskan)

d. (Ar Spered Santel)
Me 'gred er Spered Santel, a zo Doue hag a ro buez,
a zeu euz an Tad hag euz ar Mab;

(1) An diskan a dle beza berr ha nerzuz. Da skouer: "A greiz kalon, me 'gred, va Doue", pe: "Setu or feiz, setu feiz an Iliz"(a zalhom stard dezi).

Par d'an Tad ha d'ar Mab, eo adoret hag enoret,
ha komzet e-neus dre ar Brofeted. - - (Diskan)

e.(An Iliz hag ar bed da zond)

Me 'gred en Iliz, a zo unan, santel, katolik hag abostoleg.
Añzav a ran ez eus eur vadiziant hebkén, evid pardon ar pehejou.
Ha gortoz a ran adsao ar re varo da veo,
ha buez ar bed da zond. Amen. - - - - - (Diskan)

16. AR BEDENN ZUL a zeu da gloza lid ar gomz a-berz Doue; ma vez grêt war ar pemdez, e vo anvet "pedenn ar gristenien" (oratio fidelium).
Ar beleg, da genta, e berr gomzou, a lavar d'an oll unani o fedennou.
Ar haner - pe eul lenner - a zispleg goulennou ar bedenn, ha war-lerh pep hini anezo an dud a gemer eun diskan berr, êz da gana.
Da skouer: "Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn."
pe: "Selaouit, Aotrou, ar bedenn - A zav euz or halon."

Teirved Rann.- LID SAKRIFIS AN AOTER (1)

.....

- 17-18. Er penn kenta euz lidou ar zakrifis, e teu kinnig ar provou, ar bara hag ar gwin, a dleer digas war an aoter. Da heul prosesion ar provou, e kaner an "ofertouer" - kan ar hinnig - er memez doare ha kan an digor.

-
- (1) Evid komz reiso, n'eus nemed diou rann vraz en overenn: lid ar Gomz a-berz Doue, ha lid ar Zakrifis. Med araog an hini genta, on eus bet lidou an digor evel ma vo al lidou da gloza war-lerh eben.

Ma n'eus ket a gan evid ar hinnig, n'eus antivon ebéd da lenn, ha neuze pedennou ar beleg war ar bara hag ar gwin a hell beza a vouez uhel, hag ar bobl a hell respont, evel m'eo merket amañ:

19. Pedenn war ar bara:

"Bennoz deoh, Aotrou Doue, mestr ar béd,
rag euz ho madelez on eus bet ar bara-mañ a lakom dirazoh,
frouez an douar ha frouez labour mab-dén,
a zeuio da veza evidom ar bara a vuez."

R/. Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

20. A vouez izel, en eur lakad dour e-touez ar gwin:

"Dre zakramant an dour hag ar gwin-mañ, ra vo kresket ennom
buez an Doue a zo bet teurvezet gantañ kemer on natur-dén."

21. Pedenn war ar halirad gwin:

"Bennoz deoh, Aotrou Doue, mestr ar béd,
rag euz ho madelez on eus bet ar gwin-mañ a lakom dirazoh,
frouez ar winienn ha frouez labour mab-dén,
a zeuio da veza evidom evaj santel an ene."

R/. Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

22. A vouez izel, ar beleg a stou da lavared:

"Izel dirazoh, Aotrou, ha glaharet or halon,
e houlennom digemer mad diganeoh;
or zakrifis hirio ra blijo deoh, Aotrou Doue."

23. Ma kaver mad hen ober, ar beleg a ezañso bremañ ar provou hag an aoter; goudeze, e hello ar beleg hag ar bobl beza ezañset ive.

24. E korn an aoter, ar beleg a walh e zaouarn hag a lavar a vouez izel:

"Va gwalhit, Aotrou Doue, euz va fehejou, ha lakit glan va ene."

25. Distroet da greiz an aoter, e houlenn ma vo an oll unanet o pedi:

"Pedom oll, va breudeur, ma plijo da Zoue an Tad
ar zakrifis ez eom da ginnig.

R/ Evid gloar Doue ha silvidigez ar bed.

26. Ar bedenn war ar provou a lavarar neuze, atao gand ar hlozadur berr:

"... Dre Or Zalver Jezuz Krist, on Aotrou.- R/ Amen.

27-96. Ar bedenn-veur a zigor dre ar Prefas. Kavet e vezint pelloh.

96. Echu ar bedenn-veur, e penn kenta lidou ar gomunion e teu ar Bater:

Ar beleg: Kenteliet gand gourhemenn Or Zalver,

..... ha desket ma'z om bet gantañ da bedi, e kredom lavared:

An oll:

On Tad hag a zo en neñv,
hoh ano bezet santelleet,
ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grêt
war an douar evel en neñv.

Roit deom hirio or bara pemdezieg,
pardonit deom or pehejou, evel ma pardonom
d'ar re o deus mañket ouzom,
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
med on diwallit diouz an droug.

97. War-lerh goulenn diweza ar Bater, ar beleg a gendalh:

"On dizammit, Aotrou Doue, diouz peb droug,
ha plijet ganeoh rei deom ar peoh en on amzer,
ma vezim bepred, dre ho madelez, distag diouz ar pehed
ha diwallet diouz an oll drubuillou,
da hortoz an eürusted a esperom ha distro Or Zalver Jezuz-Krist.

R/ Deoh ar rouantelez, Aotrou Doue,
deoh peb gloar ha peb galloud da virviken !

98. A vouez uhel c'hoaz, ar beleg a bed evid ar peoh e diabarz an Iliz:

"Salver Jezuz Krist, c'hwi ho peus lavaret d'hoh Ebestel:
"Ar peoh a lezan ganeoh, va feoh a roan deoh";
na zellit ket ouz or pehejou, med ouz feiz hoh Iliz,
ha plijet ganeoh, hervez ho polontez, he lakad er peoh hag heh unani:
C'hwi on Doue beo ha leun a hloar, a oll-viskoaz da virviken.

R/ Amen.

99. Ar beleg: "Peoh Or Zalver ra vo bepred ganeoh.

R/ Ha gand ho spered.

100. Neuze, ma'z eus tu d'hen ober, ar beleg, pe an avieler, a lavar d'an dud:

"Kinnigit ar peoh an eil d'egile."

101. A vouez izel, pa 'neus torret ar bara ha laket eun tamm er halir:

"Korv ha Gwad Or Zalver Jezuz Krist, unanet er halir-mañ,
ra vezint magadur deom evid ar vuez peurbaduz."

102. Epad ma ra ar beleg kement-se, e vez kanet pe lavaret:

"Oan Doue, a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom. (2 wech).
Oan Doue, a zilam pehed ar bed, roit deom ar peoh.

103. A vouez izel, ar beleg a lavar unan euz an diou bedenn-mañ:

pe: Salver Jezuz Krist, Mab an Doue beo,
evid ober bolontez ho Tad ha gand nerz ar Spered Santel,
ho peus, dre ho maro, roet ar vuez d'an dud;
dre ho Korv hag ho Kwad santel, me ho ped,
va dizammit euz va oll fehejou hag euz peb droug,
ha grit din chom stag bepred ouz ho lezenn,
heb beza morse dispartiet diouzoh.

pe: Jezuz Krist, va Zalver, pa'z an da gemer ho korv hag ho kwad,
mirit na drofe ar gomunion-mañ d'am barn ha d'am hondaoni;
med, abalamour da garantez ho kalon,
grit ma talvezo d'am diwall ha d'am farea korv hag ene.

104. A-barz komunia, ar beleg a zav an osti da ziskouez d'an dud fidel:

"Eüruz ar re 'zo pedet ouz taol Or Zalver !
Setu Oan Doue, an hini a zilam pehed ar bed."

Neuze, an oll, a-unan gantañ, a lavar eur wech:

"Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon,
med lavarit eur gér hebkén, hag e vin pareet."

105. D'en em gomunia, ar beleg a lavar a vouez izel:

"Korv Or Zalver d'am diwall evid ar vuez peurbaduz.

"Gwad Or Zalver d'am diwall evid ar vuez peurbaduz."

106. Da gomunia an dud, e lavar da bep hini: "Korv Or Zalver." - R/ Amen.

107-108. Epad ma kemer ar beleg korv Or Zalver, e kroger gand kan ar Gomunion, grêt evid diskleria an unvaniez a spered hag a galon etre an dud fidel, levenez o halon, o harantez hag anaoudegez vad ouz Or Zalver.

Padoud a hell ar han-se keit ha ma'z eus tud da gomunia; med bez' e heller ive kloza abretoh, evid lezel pep hini didrouz gand e bedenn, dreist-oll ma kemerer, war-lerh ar gomunion, eur han all da veuli Doue.

109. Pa'z eo echu rei ar gomunion, ar beleg (pe an diagon) a neta ar halir hag ar bladenn, a holo anezo hag o lak a gostez. Neuze e hell ar beleg mond d'e gador pe chom ouz an aoter.

110. Eun dra vad e vo chom sioul epad eur predig amzer, evid pedi didrouz. Ma kaver gwelloc'h, evelato, e heller ive kana eur salm pe eur hantik da drugarekaad Doue.

111. Ar bedenn goude komunia a vo lavaret gand ar beleg. Goude "Pedom Doue", pe "Pedom oll a-unan", e chomer sioul eur pennadig, ma n'eus ket bet a bedenn didrouz araog. Ech u ar bedenn, an oll a respont: "Amen."

AL LIDOU DA GLOZA AN OVERENN

112-115. Goude beza grêt an embannou, ma'z eus da ober, ar beleg a zalud ar bobl hag a ro dezi e vennoz:

An Aotrou Doue ganeoh. - R/. Ha gand ho spered.

Doue oll-halloudeg d'ho penniga, + an Tad, hag ar Mab,
hag ar Spered Santel.- R/. Amen.

It e peoh Or Zalver.- R/. Bennoz da Zoue !

-- Goude beza poket d'an aoter, ar beleg a deh
hag a ya er-mêz.

Beleg: An Aotrou Doue ganeoh. - R/. Ha gand ho spered.

.....

Ho kalon d'an uhel.- R/. Troet eo warzu Doue.

Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou.- R/. Just ha santel eo.

Just ha santel eo e gwirionez, eun dra dleet ha talvouduz,
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel:

- * Rag dre vister ho Mab en em hrêt dén,
- * eur sklêrded nevez euz ho kloar a zo paret dirag sellou or spered;
- * ha bremañ p'anavezom on Doue deut da veza gwelet,
- * drezañ ez om douget da gared an traou na weler ket.

Rag-se, unanet gand an Elez hag an Arhêlez,
ha gand oll sperejou eüruz an nenvou,
ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

Santel, santel, santel an Aotrou Doue, mestr ar béd.
Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar. Hozanna e barr an neñvou !
Benniget an hini a zeu en ano Doue. Hozanna e barr an neñvou !

PREFAS GOUEL AN EPIFANI - heñvel nemed ar pez a zo merket
gand ar steredennig *.

- * Rag ho Mab unganet, dre 'n em ziskouez er bed-mañ gand on natur marvel,
 - * e-neus digaset deom kaerroh buez
 - * dre eur splannder nevez euz e natur divarvel a Zoue.
- Rag-se.....

(Evid ar Prefas, e heller ivez
kemer unan all hervez ar gouel.)

An Aotrou Doue ganeoh. - R/. Ha gand ho spered.
Ho kalon d'an uhel. - R/. Troet eo warzu Doue.
Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou.- R/. Just ha santel eo.

Just ha santel eo, evid gwir, eun dra dleet ha talvouduz,
lavared deoh on trugarez, Tad santel, e peb leh hag e peb amzer,
dre Jezuz Krist, ho Mab karet.

Eñ eo ho komz beo, ho peus dreizañ krouet peb tra,
eñ an hini ho peus digaset deom evel Salver ha Dasprener,
Doue deut da veza dén dre nerz ar Spered Santel,
ha ganet euz ar Werhez Vari.

Evid ober penn-da-benn ho polontez
ha prena an dud d'ober anezo ho pobl santel,
e-neus astennet e zivreh war ar groaz:
en eur vervel e-neus distrujet ar maro,
en eur zevel beo euz ar béz, e-neus diskouezet e hloar.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da embann ho kloar, en eur gana deoh meuleudi:

SANTEL, santel, santel an Aotrou Doue, mestr ar bed.
Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar. Hozanna e barr an neñvou.
Benniget an hini a zeu en ano Doue. Hozanna e barr an neñvou.

E gwirionez, c'hwi 'zo santel, Aotrou Doue,
hag ahanoh e teu peb santelez.

Plijet ganeoh eta santellaad ar provou-mañ, dre nerz ho Spered Glan,
ma teuint da veza evidom Korv ha Gwad Or Zalver Jezuz Krist.

En noz ma oa gwerzet, ha m'en em ginnige deoh evid gouzañv e Basion,
Jezuz a gemeras bara, ha, goude beza rentet deoh bennoz ha trugarez,
e dorras hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HA DEBRIT EUZ HEMAN,
RAG VA HORV EO, ROET EVIDOH."

Evelse c'hoaz, goude koan, e kemeras ar halirad gwin,
e rentas deoh adarre bennoz ha trugarez,
hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HAG EVIT EUZ AR HALIRAD-MAN,
RAG VA GWAD EO, GWAD AN EMGLEO NEVEZ HA PEURBADUZ,
A VO SKUILLET EVIDOH HAG EVID AN OLL DUD,
DA BARDONI AR PEHEJOU.

C'HWI 'RAIO KEMENT-MAN GAND AR ZONJ AHANON."

Setu amañ mister ar feiz.- R/ Ni 'zoñj gand feiz, Salver Jezuz,
en ho maro kén presiu;
meuleudi deoh savet da veo:
ni ho kortoz da zond en-dro.

Gand ar zoñj eta - euz Or Zalver maro evidom
ha savet euz ar béz leun a vuez,
e kinnigom deoh, Aotrou Doue, bara ar vuez ha kalirad ar zilvidigez,
gand or brasa trugarez evid an digemer a rit deom amañ
hag an eurvad da helloud kinnig deoh an overenn.

Gand eur galon izel, e reom ouzoh ar bedenn-man:
pa gemerim bremaig Korv ha Gwad Or Zalver,
ra vezim unanet kenetrezom, dre ar Spered Santel.

Ho pet soñj, Aotrou Doue, euz hoh Iliz, skignet dre ar béd a-béz:
Grit ma kresko en ho karantez, a-unan gand on Tad santel ar Pab,
an Aotrou 'n Eskob, ha kement hini e-neus karg euz ho pobl.

- (1) Ho pet soñj c'hoaz euz or breudeur eet da anaon,
gand an esperañs da zevel a varo da veo,
hag euz an oll dud tremenet :
roit dezo ar joa da weled sklerijenn ho tal en ho paradoz.

-
- (1) En overennou evid an Anaon, e vo lavaret:

Ho pet soñj euz ho servicher N., ho peus galvet euz ar bed-mañ davedoh:
pegwir eo bet unanet gand Or Zalver, ho Mab,
bet heñvel outañ o tremen dre ar maro,
grit ma vo par dezañ ivez o sevel euz a varo da veo.

Warnom-ni ivez, plijet ganeoh skuill ho madelez,
ma hellim kaoud perz er vuez peurbaduz,
a-unan gand ar Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue,
gand an Ebestel eüruz hag an oll Zent euz peb amzer,
ha renta deoh da viken gloar ha meuleudi
dre Jezuz Krist, ho Mab karet.

A zo dreizañ, ha gantañ, hag ennañ,
deoh-c'hwil, Doue an Tad oll-halloudeg, a-unan gand ar Spered Glan,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken.

R/ AMEN.

- Goude ar Prefas hag ar Sanctus -

(Meuleudi d'an Tad, a skuill buez ha santelez:)

E gwirionez, c'hwi zo santel, Aotrou Doue,
hag an oll grouadurien a dle ho meuli,
rag, dre ho Mab, Or Zalver Jezuz Krist, ha dre nerz ar Spered Santel,
c'hwi a ro buez ha santelez da beb tra.
Heb ehan e tastumit an dud d'ober ho pobl ganto,
evid ma vezo, euz ar zav-heol beteg ar huz-heol,
kinniget deoh eur zakrifis glan ha santel.

(Da houlenn ma vo sakret ar provou:)

A greiz kalon ni ho ped, Aotrou Doue,
evid ar provou-mañ a zigasom deoh da zakri:
lakit da ziskenn warno, dre ho Spered Santel, gras ho santelez,
ma teuint da veza Korv ha Gwad Or Zalver Jezuz Krist,
a lidom war e urz an overenn-mañ.

(Er goan diweza:)

En noz ma oa gwerzet, Jezuz a gemeras bara,
ha goude beza rentet deoh bennoz ha trugarez,
e dorras hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HA DEBRIT EUZ HEMAN,
RAG VA HORV EO, ROET EVIDOH."

Evelse c'hoaz, goude koan, e kemeras ar halirad gwin,
e rentas deoh adarre bennoz ha trugarez,
hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HAG EVIT EUZ AR HALIRAD-MAN,
RAG VA GWAD EO, GWAD AN EMGLEO NEVEZ HA PEURBADUZ,
A VO SKUILLET EVIDOH HAG EVID AN OLL DUD,
DA BARDONI AR PEHEJOU.

C'HWI 'RAIO KEMENT-MAN GAND AR ZONJ AHANON."

Setu amañ mister ar feiz. ~~B~~. Ni 'zoñj gand feiz, Salver Jezuz,
en ho maro kén presiuz;
meuleudi deoh savet da veo:
ni ho kortoz da zond en-dro.

(Ar beleg, en ano an oll, a ginnig d'an Tad sakrifik Jezuz:)

Setu perag, Aotrou Doue,
gand ar zoñj euz ho Mab, e-neus gouzañvet evid or zilvidigez,
a zo gand gloar savet euz ar béz ha pignet d'an neñv,
epad ma hortozom e zistro,
ni a ginnig deoh, d'ho trugarekaad, ar zakrifik-mañ beo ha santel.

(Da houlenn ma vo unanet ar gristenien dre ar zakramant:)

Sellit, ni ho ped, ouz ar brovadenn-mañ, a zoug dirazoh ho pobl santel.
O weloud enni sakrifik ho Mab, n'eus nemetañ da blijoud deoh,
selaouit or pedenn: pa vim bet maget gand Korv ha Gwad Or Zalver,
ha karget gand ar Spered Santel, ra vezim unanet kenetrezom,
en Aotrou Krist, beteg beza eur horv hag eur spered hebkén.

(Evid beza unanet gand ar Zent:)

Ar Spered Santel ra lako ahanom e stad da veza, ni ivez,
eur brovadenn beurbaduz d'ho kloar,
deom da gaoud perz en eürusted ar baradoz, etouez an dud salvet,
da genta gand ar Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue,
an Ebestel, ar verzerien eüruz hag an oll Zent ha Sentezed,
on eus fizians bepred e sikour o fedennou.

(Pedenn evid ar bed hag an Iliz:)

Ar zakrifis-mañ, hag a zigas deom ho pardon,
ra vo talvouduz, ni ho ped, Aotrou Doue,
evid peoh ha silvidigez ar bed a-béz.
Hoh Iliz, a zo war an douar en hent warzu ho rouantelez,
plijet ganeoh ma talho stard er feiz hag er garantez,
ha ganti ho servicher, on Tad santel ar Pab,
an Aotrou 'n Eskob, an oll eskibien,
ar veleien, hag ho pobl kristen a-béz.
Selaouit gand madelez pedennou ho tud fidel amañ dirazoh.
En ho trugarez, Tad madelezuz, bodit en-dro deoh
an oll dud ho pugale, strewet dre bevar horn ar bed.

(Pedenn evid an Anaon, ha klozadur:)

Evid or breudeur ha c'hoarezed eet da anaon,
hag evid kement re o deus kuiteet ar bed-mañ en ho karantez,
e houlennom diganeoh digemer vad en ho rouantelez,
el leh m'on eus esperañs d'en em gavoud d'on tro, oll asamblez
ha da virviken, e-kreiz eürusted peurbaduz ho kloar,
dre Or Zalver Jezuz Krist, a skuillit drezañ war ar bed kement mad a zo.

A zo drezañ, ha gantañ hag ennañ,
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg, a-unan gand ar Spered Glan,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken. - R/ AMEN.

(En overennou an Anaon, ar bedenn evid ar re dremenet hag ar hlozadur
a vo evel-henn:)

Ho pet soñj, Aotrou Doue, euz ho servicher (servicherez) N.,
ho peus (hirio) galvet da guitaad ar bed-mañ:
pegwir eo bet, dre ar vadiziant, unanet gand ar Zalver, ho Mab,
ha laket da denna dezañ en eur dremen eveldañ dre ar maro,
grit ma vo par dezañ ivez en eur adsevel a varo da veo,
en deiz ma raio d'ar re varo sevel euz ar béz
hag e lako or horvou dister-ni heñvel ouz e gorv gloriuz.

Evid or breudeur hag or hoarezed eet da anaon,
hag evid kement re o deus kuiteet ar bed-mañ en ho karantez,
e houlennom diganeoh digemer vad en ho rouantelez,
el leh m'on eus esperans d'en em gavoud d'on tro, oll asamblez
ha da virviken, e-kreiz eürusted peurbaduz ho kloar,

rag neuze c'hwi a zeho deom on daoulagad,
hag o weled ahanoh evel ma'z oh, c'hwi on Doue,
ni 'vo heñvel ouzoh da virviken, hag ho meulo heb fin ebéd,

dre Or Zalver Jezuz Krist,
a skuillit drezañ war ar bed kement mad a zo.

A zo drezañ, ha gantañ hag ennañ,
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg, a-unan gand ar Spered Glan,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken.

- R/ AMEN.

AR GENTA PEDENN-VEUR (Kanon roman)

(Da houlenn ma vo sakret ar provou)

Tad leun a vadelez, a greiz or halon ho pedom,
 dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 da zigemer ha da venniga ar provou-mañ,
 sakrifikis glan ha santel,
 a ginnigom deoh da genta evid hoh Iliz santel katolik, (Pedenn evid an Iliz)
 ma plijo ganeoh, dre ar bed a-béz,
 he diwall er peoh, heh unani hag he rén.

Kinnig a reom c'hoaz ar zakrifikis
 evid ho servicher, on Tad santel ar Pab,
 an Aotrou 'n Eskob,
 ha kement hini e-neus karg da vired ar gwir feiz,
 deut dre an Ebestel.

(evid ar Pab,

 an Eskob...)

Ho pet soñj, Aotrou Doue, euz ho servicherien NN.,
 hag euz ar re 'zo amañ en-dro deom,
 a anavezit o feiz hag o harantez.
 Evito e kinnigom, hag int-i a ginnig deoh
 ar zakrifikis-mañ a veuleudi;
 evito hag o zud, evid o zilvidigez,
 evid yhed o horv hag o ene,
 e lakont kinnig deoh an overenn,
 Doue peurbadel, beo ha gwirion.

(evid an dud fidel)

Unanet gand an Iliz a-béz, e fell deom enori
 da genta an Itron Varia bepred gwerhez,
 Mamm da Jezuz Krist, on Doue hag on Aotrou,

(Enor d'ar Zent)

sant Jozef, he fried,
an Ebestel hag ar Verzerien eüruz

Pèr ha Paol, Andrev,
(Jakez ha Yann, Tomaz, Jakez ha Filip,
(Bartolome ha Maze, Simon ha Tadde,
(Lin, Klet, Klemant, Sist, Korneli ha Siprian,
(Lorans, Krizogon, Yann ha Paol, Kosm ha Damian,)
hag an oll Zent.

Dre o meritou hag o fedennou,
ni ho ped d'or zikour ha d'on diwall bepred.
(Dre ar Zalver Jezuz, on Aotrou. Amen.)

Ha setu dirazoh ar brovadenn
a ginnigom, ni ho peleien, ha ganeom ho famill a-béz:
kemerit anezi gand madelez, Aotrou Doue;
grit deom beva en ho peoh er bed-mañ

hag, e-leh beza daonet,
mond gand ho Sent d'ar baradoz.
(Dre ar Zalver Jezuz, on Aotrou. Amen.)

Plijet ganeoh, o Doue, dre nerz ho pennoz,
peurwellaad ha santellaad ar brovadenn-mañ,
ma vo e stad da blijoud deoh,
ha ma teuio da veza evidom
Korv ha Gwad ho Mab karet, Jezuz Krist on Aotrou.

D'an noz araog e Basion,
Jezuz a gemeras bara en e zaouarn santel,
hag, e zaoulagad troet ouz an neñv
warzu ennoh, Doue e Dad oll-halloudeg,

Notenn. - Aotre a zo
da lezel a-gostez ar pez
a zo etre krochedou.

(Adarre da houlenn ma vo
sakret ar provou.)

(Ar memez pedenn.)

(Ar Goan ziweza.)

e rentas deoh trugarez ha bennoz,
e torras ar bara hag e roas d'e ziskibien,
en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HA DEBRIT EUZ HEMAN,
RAG VA HORV EO, ROET EVIDOH."

Evelse c'hoaz, goude koan,
o veza kemeret ar halirad priziuz-mañ
etre e zaouarn santel,

ha rentet deoh adarre trugarez ha bennoz,
her roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HAG EVIT EUZ AR HALIRAD-MAN,
RAG VA GWAD EO, GWAD AN EMGLEO NEVEZ HA PEURBADUZ,
A VO SKUILLET EVIDOH HAG EVID AN OLL DUD,
DA BARDONI AR PEHEJOU.

C'HWI 'RAIO KEMENT-MAN GAND AR ZONJ AHANON."

Setu amañ mister ar feiz.- R/ Ni 'zoñj gand feiz, Salver Jezuz,
En ho maro ken presiuz;
Meuleudi deoh savet da veo:
Ni ho kortoz da zond en-dro.

Setu perag ni amañ, ho peleien hag ho pobl santel,
gand ar zoñj euz Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
gouzañvet gantañ e Basion evidom,
savet beo a-douez ar re varo
ha pignet da hloar an neñvou,
ni a ginnig deoh-c'hwi, Doue uhel-meurbed,
diwar ho tonezonou,

(Gand ar zoñj...
.....)

(ni a ginnig...
.....)

ar zakrifis glan, ar zakrifis santel,
bara sakr ar vuez peurbaduz ha kalirad ar zilvidigez.

Taolit warno, ni ho ped, eur zell a garantez;
hag evel m'eo bet plijet deoh
provou Abel, ho servicher mad,
sakrifikis Abraham on tad
hag hini Melkisedeg, ho peleg meur,
grit digemer vad d'ar zakrifikis santel-mañ,
provadenn dinamm.

A galon izel ho pedom, Doue oll-halloudeg:
grit ma vo douget, dre hoh Elez santel,
dirazoh en neñv, war aoter ho kloar,
evid ma tiskenno peb gras ha peb bennoz
warnom-ni oll a resevo, diwar an aoter-mañ,
Korv ha Gwad ho Mab, Jezuz Krist, on Aotrou. (Amen.)

(da houlenn frouez an
overenn evid ar re
a zo enni.)

Ho pet soñj ivez, Aotrou Doue,
euz ho servicherien N.N.,
eet da Anaon gand merk ar fdiz
ha bremañ kousket er peoh.
Dezo ha d'an oll Anaon a repoz en Aotrou Krist,
roit en ho paradoz, ni ho ped,
sklerijenn, peoh ha levenez.
(Dre ar Zalver Jezuz, on Aotrou. Amen.)

(Evid an Anaon.)
.....

Ha deom ive, peherien,
leun a fizians en ho trugarez,
ho pet ar vadelez da rei on lod er vuez eüruz
gand hoh Ebestel hag ho Merzerien zantel:
Yann Vadezour, Stevan, Mazeaz ha Barnabaz,
(Ignas, Aleksandr, Marsellin ha Pèr,
Felisite, Perpetua, Agata, Lusie, Agnez,
Sesilia, Anastazia,)
hag an oll Zent.

(da houlenn evidom
lod en eürusted
gand ar Zent.)

Evid on digemer en o zouez,
na rit ket diouz talvoudegez on oberou,
med skuillit grasou puill ho pardon:
dre ar Zalver Jezuz, on Aotrou.

Drezañ e krouit an oll draou-mañ mad bepred,
e lakit enno santelez, buez ha bennoz,
evid o rei deom e donezon.

DRE JEZUZ KRIST, HA GANTAN, HAG ENNAN, (Ar veuleudi vraz.)
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg, a-unan gand ar Spëräd Sântel,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken. - R/ AMEN.

"COMMUNICANTES" ha "HANC IGITUR" evid deizioù 'zo

Da houel Nedeleg.- "Communicantes" (e traoñ p. 23) :

Unanet gand an Iliz a-bez,
e lidom an nozvez (pe: an deiz) santel meurbed
ma voe ganet gand an Itron Varia bepred gwerhez
eur Zalver d'ar bed-mañ;
hag e fell deom enori da genta ar Werhez Vari,
Mamm da... etc.

D'an Epifani.- Unanet gand an Iliz a-béz, e lidom an deiz santel meurbed
m'eo bet ho Mab unganet, par deoh en ho kloar peurbadel,
en em ziskouezet a-wel d'an dud, gand e gorr heñvel ouz on hini,
hag e fell deom enori da genta an Itron Varia bepred gwerhez,
Mamm da... etc.

D'ar Yaou-Gamblid.- "Communicantes" ha "Hanc igitur" (e-kreiz p. 24) :

- 1) Unanet gand an Iliz a-béz, e lidom an deiz santel meurbed
m'eo bet Or Zalver Jezuz Krist gwerzet ha roet d'ar maro evidom,
hag e fell deom enori... etc.
- 2) Ha setu dirazoh ar brovadenn a ginnigom,
ni ho peleien, ha ganeom ho famill a-bez,
da geñver an deiz ma '-neus Or Zalver Jezuz Krist
roet d'e ziskibien sakramant e Gorv hag e Wad,
dezo goudeze da lida an overenn;
kemerit or provadenn gand madelez... etc.
- 3) (E-leh "D'an noz araog e Basion", lakaad:)
Hirio, d'an noz araog ma houzañvas
evidom hag evid silvidigez an oll... etc.

Da Bask.- 1) Unanet..., e lidom an nozvez (pe: an deiz) santel meurbed
ma'z eo Or Zalver Jezuz Krist adsavet a varo da veo... etc.

- 2) Ha setu..... ho famill a-béz,
hag hirio he hinnigom ouspenn evid ar re ho peus roet dezo,
dre an dour hag ar Spered Santel,
buez nevez gand ar pardon euz o fehejou: kemerit anezi... etc.

D'ar Yaou-Bask.- "Communicantes" hebkén :

Unanet gand an Iliz a-béz, e lidom an deiz santel meurbed
ma '-neus ho Mab unganet, on Aotrou, douget on natur-dén gwan ha
dister - a-zeou deoh en ho kloar; hag e fell deom... etc.

D'ar Pantekost.- Unanet..., e lidom deiz santel meurbed ar Pantekost,
pa'n em ziskouezas ar Spered Santel d'an Ebestel
e stumm teodou tan; hag e fell deom enori... etc.

-- Evid ar "Hanc igitur": evel da Bask. --

+++++

AR BEDERVED PEDENN-VEUR

Ar prefas a gaver amañ a zo stag ouz ar
bedenn-veur-mañ: ne vez kemmet morse.

E gwirionez, eun dra gaer eo ho trugarekaad,
eun dra just eo renta gloar deoh, Tad santel,
rag c'hwi eo an Doue n'eus nemetañ, beo ha gwirion;
c'hwi 'zo a oll-viskoaz, hag a vo da virviken,
ken skeduz ho sklêrded

(Meuleudi an Doue
uhel-meurbed.)

ma 'neus lagad na spered ebed gouest d'he gweled.

Doue leun a vadelez, mammenn ar vuez,

(Doue krouer ar bed.)

c'hwi ho peus krouet ar bed,

evid skuill ho pennoz war ho krouadurien

ha laouennaad kalz anezo gand ar sked euz ho sklerijenn.

Setu perag emañ dirazoh rummadou diniver an Elez,

noz-deiz ouz ho servicha, eüruz o weled gloar ho tal,

hag heb ehan o rei deoh meuleudi.

A-unan ganto, ni ivez, ha dre or mouez ar bed krouet a-bez,

a 'fell deom ho meuli, en eur lavared a vouez uhel:

Santel, santel, santel an Aotrou Doue, mestr ar bed.

Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar. Hozanna e barr an neñvou.

Benniget an hini a zeu en ano Doue. Hozanna e barr an neñvou.

Ho meuli a reom, Tad santel,

rag c'hwi 'zo braz

hag an oll oberou ho peus grêt 'zo diwar furnez
ha karantez.

(Trugarez da Zoue
evid e vadelez
e kenver an dud.)

An dén ho peus krouet da denna deoh,

hag en e zaouarn ho peus fiziet ar bed,

evid ma vije servicher deoh hebkén e Grouer,

ha mestr war an oll grouadurien.

Kollet gantañ ho karantez, o tizenti ouzoh,
n'eo ket bet dilezet ganeoh dindan galloud ar maro;
rag, en ho trugarez, ho peus roet dorn d'an oll dud
d'ho klask ha d'ho kavoud.

Meur a wech ho peus kinniget d'an dud ober emgleo ganeoh,
ha dre ar Brofeted ho peus maget enno esperans ar zilvidigez.

Kement ho peus karet ar bed, Tad santel,
m'ho peus digaset war an douar, pa oa deut an amzer,
ho Mab deoh-c'hwi evid beza Or Zalver.

(Donedigez ar Zalver)

En em hrêt dén dre nerz ar Spered Santel,
ganet euz ar erhez Vari,
e-neus rénet buez mab-dén e peb tra, nemed ar pehed.
D'ar re baour e tigase kelou mad ar zilvidigez,
d'ar re 'oa er jadennou o frenedigez,
d'ar re 'oa glaharet levenez o halon.

(Silvidigez an dud.)

Evid kas da benn menoz ho karantez,
eo bet en em roet d'ar maro,
hag en eur zevel beo euz ar béz,
e-neus diskaret ar maro hag adnevezet ar vuez.
Ha neuze, pa'z eo marvet ha savet da veo evidom,
evid ober deom beva evitañ, ha n'eo ket evidom on-unan,
euz ho perz, Tad santel, e-neus digaset
ar Spered Santel d'ar gristenien,
da beurechui e labour èr bed, ha kas da vad peb santelez.

Selaouit bremañ or pedenn, Aotrou Doue:
ra blijo gand ar Spered Santel santellaad ar provou-mañ,
ma teuint da veza Korv ha Gwad Or Zalver Jezuz Krist,
deom-ni da lida bremañ mister meur sakrifis an aoter,
e-neus Jezuz lezet ganeom da emgleo peurbaduz.

(Da houlenn ma vo
sakret ar provou.)

Pa oa deut evitañ an eur da reseo e hloar

(Ar Goan ziweza)

diganeoh, Tad santel,

goude m'e-noa karet ervad an dud a oa dezañ er bed,

Jezuz a zo eet gand e garantez beteg penn.

Epad o hoan, e kemeras bara, e rentas bennoz deoh,

e torras anezañ hag e roas d'e ziskibien, en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HA DEBRIT EUZ HEMAN,

RAG VA HORV EO, ROET EVIDOH."

Evelse c'hoaz, e kemeras ar halirad gwin,

e rentas bennoz deoh hag hen roas d'e ziskibien,

en eur lavared:

"KEMERIT OLL, HAG EVIT EUZ AR HALIRAD-MAN,

RAG VA GWAD EO, GWAD AN EMGLEO NEVEZ HA PEURBADUZ,

A VO SKUILLET EVIDOH HAG EVID AN OLL DUD

DA BARDONI AR PEHEJOU.

C'HWI 'RAIO KEMENT-MAN GAND AR ZONJ AHANON."

Setu amañ mister ar feiz.- R/ Ni 'zonj gand feiz, Salver Jezuz,

En ho maro ken presiuz;

Meuleudi deoh savet da veo:

Ni ho kortoz da zond en-dro.

Bremañ d'on tro, Aotrou Doue,

(Gand ar zoñj...)

dre an overenn-man, adnevezet enni mister or zilvidigez,

ni a zigas da zoñj euz Or Zalver marvet ha laket er béz,

hag a ziskleir or feiz ennañ savet da veo

ha pignet d'an neñv en tu deou deoh;

ha, da hortoz e zistro leun a hloar,

(ni a ginnig...)

ni a ginnig deoh e Gorv hag e Wad,

ar zakrifis n'eus nemetañ a hell plijoud deoh
ha savetei ar bed.

Taolit ho sellou, Aotrou Doue, war ar brovadenn
he deus hoh Iliz bet diganeoh.

En ho madelez, roit d'ar re a gemero
euz ar bara hag ar halirad-mañ
ar hras da veza, dre ar Spered Santel,
unanet stard en eur horv hebkén,
evid dond da veza, ind ivez, en Aotrou Krist,
eur zakrifis beo, kinniget en enor d'ho kloar.

Ha bremañ, Aotrou Doue, ho pet soñj
euz an oll dud a ginnigom evito ar zakrifis-mañ:
da genta ho servicher, on Tad santel ar Pab,
an Aotrou 'n Eskob, an oll eskibien dre ar bed,
ar veleien, an dud a ginnig an overenn-mañ
ha kement hini 'zo amañ en-dro deom,
ho pobl kristen a-béz,
hag erfin an oll dud a glask ahanoh a wir galon.

Ho pet soñj c'hoaz
euz or breudeur eet da anaon e peoh Or Zalver,
hag euz an oll dud tremenet,
n'eus nemedoh a anavez o feiz.

Deom-ni oll, bugale deoh, Tad madelezuz,
roit ar grasou on eus ezomm
evid gounid on lod er vuez peurbaduz,

(Da houlenn frouez
an Overenn evid
ar re 'zo enni.)

(Evid an Iliz
hag ar bed.)

(Evid an Anaon.)

(Evidom, da gaoud
perz en eürusted
gand ar Zent.)

a-unan gand ar Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue,
an Ebestel hag ar Zent, en ho rouantelez.
Eno, gand ar bed krouet a-béz,
lamet diwarnan breinadurez ar pehed hag ar maro,
e vezim eüruz o renta deoh gloar hag enor,
dre Or Zalver Jezuz Krist,
a skuillit drezañ war ar bed kement mad a zo.

(Ar veuleudi vraz)
.....

A zo drezañ, ha gantañ hag ennañ,
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg,
a-unan gand ar Spered Santel,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken.

R/ AMEN.

511 + 11 11 11 11 11

SULIOU AR BLOAZ I - An Aotrou Doue ganeoh. - R/. Ha gand ho spered.
 Ho kalon d'an uhel. - R/. Troet eo warzu Doue.
 Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou. - R/. Just ha santel eo.

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, or Zalver.

Gand mister e Bask, pa'z eo bet marvet ha savet da veo,
 pebez ober burzuduz e-neus grêt Jezuz:
 tenna ahanom a-zindan galloud ar pehed hag ar maro,
 evid or gelver d'ar stad enoruz m'eo on hini;
 rag bremañ e vezom anvet: poblad-tud dibabet gand Doue, gouenn zantel,
 broad a veleien hag a rouaned, poblad dasprenet,
 ha deom eo an enor da vruda e peb leh
 an traou kaer grêt dre ho kalloud,
 c'hwi hag ho-peus tennet ahanom euz an deñvalijenn,
 evid or gelver da vond en ho sklerijenn.

* Setu perag, a-unan gand an Elez hag an Arhêlez,
 ha gand oll sperejou eüruz an neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken: SANTEL, etc...

(Bez' e heller ivez echui evelhénn:)

* Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
 e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared da viken:

+++++

SULIOU AR BLOAZ II - An Aotrou Doue ganeoh.- R/. Ha gand ho spered.
Ho kalon d'an uhel. - R/. Troet eo warzu Doue.
Lavarom bennoz da Zoue;on Aotrou.- R/. Just ha santel eo.

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Gand truez ouz an dud kollet dre ar pehed,
ho Mab a zo bet teurvezet gantañ dond er bed-mañ
ha beza ganet gand ar Werhez Vari;
o vervel war ar groaz, e-neus tennet ahanom euz ar maro da viken,
hag, o sevel a varo da veo, e-neus roet deom ar vuez peurbaduz.

Setu perag, a -unan gand an Elez hag an Arhêlez
ha gand oll sperejou eüruz an neñvou,
ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken: SANTEL, etc...

(Bez' e heller ivez echui evelhénn:)
.....

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared da viken:

+++++

ER HORAIZ, DA VERHER AL LUDU - (An teir linenn genta evel uhelloh.)

... Rag dre ar pinijennou e vougite ennom ar gwall-dechou,
e savite or sperejou d'an uhel, e roite deom nerz da boania
ha digoll peurbaduz, dre Jezuz Krist, or Zalver.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
 ha ganto e fell deom unani or moueziou,
 evid lavared a greiz kalon: SANTEL, etc...

+++++

SULIOU AR HORAIZ -

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, or Zalver.
 Rag beb bloaz e halvit ho tud fidel da walhi o eneu,
 evid gortoz laouen goueliou santel ar Pask.
 Evelse, p'o-devo poaniet startoh d'ho servicha
 ha da ziskouez karantez d'o nesa,
 ha pa zistroint da vammenn o buez kristen,
 Pask Or Zalver hag e zakramañchou,
 e tigoro brasoh o halon d'ar hras a ra anezo ho pugale.
 Setu perag, a-unan gand an Elez ... etc.

+++++

WAR AR PEMDEZ ER HORAIZ - (An teir linenn genta evel uhelloc.)

... C'hwi a blij deoh or pinijennou,
 pa'z int eur zakrifis kinniget d'ho kloar;
 Rag an diouerou a reom, ouspenn diskar on ourgouill,
 a zoug ahanom da veza trugarezuz evelдох
 ha da ranna or bara gand or breudeur ezommeg.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
 e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared da viken: SANTEL, etc...

+++++

PREFAS AR GROAZ -

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

C'hwi ho peus staget ouz koad ar Groaz silvidigez an oll dud;
rag, pa oa deuet ar maro diwar goad eur wezenn,
dre ar hoad ivez e tlee ar vuez sevel a-nevez;
hag an diaoul enebour, bet trêh war on tud kenta diwar ar wezenn,
a dlee d'e dro beza trêhet diwar ar hoad war Menez-Kalvar,
gand Jezuz Krist, or Zalver.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou,
en eur lavared a greiz kalon: SANTEL, etc...

+++++

PREFAS GOUEL PASK

E gwirionez, just ha santel eo
embann ho meuleudi, Aotrou Doue, e peb amzer,
med muich eged biskoaz en nozvez-mañ (pe: en deiz-mañ, en amzer-mañ)
pa'z eo bet on Oan Pask, an Aotrou Krist, laket d'ar maro evidom.
Rag an Oan gwirion eo Jezuz, e-neus dilamet pehed ar bed,
e-neus, o vervel, distrujet or maro,
hag oh adsevel da veo, roet deom buez nevez.

* Setu perag, a-unan gand an Elez hag an Arhêlez
ha gand oll sperejou eüruz an neñvou,
ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

pe: * Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar,
en eur lavared a greiz kalon:

PREFAS NEVEZ EVID AR BASION

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag ar bed krouet a-béz, pa'z eo bet salvet dre Basion ho Mab,
 a zo bremañ a-nevez e stad da rei enor d'ho kloar;
 dre halloud ar groaz, he deus douget or zilvidigez,
 e welom, ker splann hag er vrasa sklerijenn,
 ez eo barnet ar bed fall,
 ha gounezet an treh gand Or Zalver war e groaz.

Setu perag.....

=====

PREFAS EN ENOR D'AR WERHEZ -

E gwirionez, just ha santel eo,
 Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 ha, gand gouel ar Werhez gloriuz Vari (konsevet heb pehed, etc...), (1)
 kana deoh meuleudi, gloar ha bennoz.
 Hi he deus, dre nerz ar Spered Santel, konsevet ho Mab unganet,
 hag en eur vired an enor da jom gwerhez,
 he deus roet d'ar bed ar sklerijenn beurbadel,
 ar Zalver Jezuz, on Aotrou.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
 ha ganto e fell deom unani or moueziou, en eur lavared a greiz kalon:

- (1) Goueliou ar Werhez: "gand gouel" ginivelez ar W.- ... seiz glahar ar W. -
 "gand gouel ar Werhez gl. Vari" kinniget en Templ, saludet gand an El,
 eet da weled Elizabed.

PREFAS AN ANAON -

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ e-neus laket da bara dirazom
an esperañs da zevel en-dro beo hag eüruz;
ha dre-ze, ma'z eo tenn rañkoud mervel,
ez om frealzet gand ar bromesa da veva divarvel.
Rag, evid ho tud fidel, Aotrou Doue,
ar vuez, pell euz beza kollet, a dro d'eur vuez welloh;
ha, pa vez echu o demeurañs er bed-mañ,
e kavont unan peurbaduz er baradoz.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

+++++

WAR AR PEMDEZ E-DOUG AR BLOAZ I - (Ar peder linenn genta evel uhelloh.)

Ennañ eo bet plijet ganeoh adunani an oll grouadurien,
hag ober deom beva euz ar vuez a zo ennañ leun-barr.
Rag eñ, goude ma oa gwir Doue,
a zo fellet dezañ dond da veza ken dister ha netra,
ha dre ar gwad e-neus skuillet war ar groaz,
e-neus digaset ho peoh d'ar bed;
ablamour da-ze, eo bet savet dreist da beb tra,
ha d'an oll dud a zent outañ, e ro gras ar zilvidigez peurbaduz.
Setu perag.....

=====

P R E F A S O U (1)

AN AZVENT I - beteg ar 16 a viz kerzu -

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ a zo deut, evid ar wech kenta, en eur gemer natur mab-dén,
hag, o seveni menoz ho karantez e-keñver an dud,
e-neus digoret deom an hent d'ar zilvidigez peurbaduz;
dre-ze, pa zeuio evid an eil gwech e splannder e hloar,
e resevim erfin, e sklerijenn ar baradoz,
madou ar vuez eüruz, emgom bremañ o hortoz gand feiz birvidig.

- * Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

Pe, gand ar hlozadur hirroh:

- * Setu perag, a-unan gand an Elez hag an Arhêlez
ha gand oll sperejou eüruz an neñvou,
e kanom d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

(1) Prefasou all a zo bet embannet dija e Kaierou Kenvreuriez ar Brezoneg:
Nedeleg hag Epifani en n° I, p. 15; Suliou ar bloaz I ha II, re ar
Horaiz, ar Groaz, ar Basion, gouel Pask, ar Werhez Vari, an Anaon,
war ar pemdez e-doug ar bloaz I, en n° 3, p. 35-40.
Oll e vezint kavet en o renk el Levr-Overenn aoter.

AZVENT II - azaleg ar 17 a viz kerzu -

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ a oa kelou anezañ a bell amzer gand an oll brofeted;
ar Werhez, e Vamm, gand karantez tener he deus e hortozet;
Yann Vadezour e-neus embannet d'an dud edo o tond,
hag e ziskouezet dezo deut en o zouez.

Eñ a lak ahanom bremañ da drei gand levenez warzu mister e hanedigez,
evid ma kavo ahanom, pa zigouezo,
aketuz da bedi ha laouen ouz e veuli.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

WAR AR PEMDEZ EDOUG AR BLOAZ II

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag abalamour d'ho madelez ho peus krouet an dén,
ha pa ne oa nemed just deoh e gondaoni evid e behed,
én ho trugarez ho peus roet dezañ ar zilvidigez,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou,
en eur lavared a greiz kalon:

AR PANTEKOST - Testenn nevez -

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer, c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
 Rag, evid peurechui an oberou burzuduz ho peus grêt evid ho pugale gand mister Pask Or Zalver, maro hag adsavet da veo, en deiz-mañ ho peus laket da ziskenn war an Ebestel ar Spered Santel ho poa prometet kas dezo.
 Dre ar Spered-se, adal m'eo bet ganet an Iliz, euz an oll vroïou e teu an dud d'anaoud ahanoh, o gwir Doue, hag e tiskleriont oll, pep hini en e yéz, an heveleb feiz.
 Setu perag, war an douar euz euz penn d'egile, emañ pobl an dud vadezet o tridal gand ar vrasa levenez, epad m'emañ, e-barz an neñvou, an oll sperejou eüruz o kana meuleudi d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

AN DREINDED

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer, c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
 Gand ho Mab unganet hag ar Spered Santel, c'hwi 'zo eun Doue hebkén, tri ferson er memez natur a Zoue.
 Kement tra a gredom diwarbenn ho kloar, dre m'ho-peus hen diskuliet deom, a gredom kenkoulz euz ho Mab hag euz ar Spered Santel, heb tamm kemm ebed.
 Rag-se, pa rentom enor d'an Doue gwirion ha peurbadel, eh adorom an tri ferson, dezo ar memez natur, ha par an eil d'egile.
 Evelse é ro meuleudi deoh an Elez hag an Arhêlez, hag oll sperejou eüruz an neñvou, n'o-deus oll nemed eur vouez, o kana da viken:

SAKRAMANT AN AOTER

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,

dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ, ar beleg gwirion, beleg da viken, e-neus lezet gand e ziskibien
ar zakrifis na vo nemetañ beteg fin ar bed:

er Goan diweza, e-neus, eñ da genta, en em ginniget deoh

e sakrifis evid or zilvidigez,

ha goudeze e-neus lavaret deom e ginnig d'on tro, gand ar zoñj anezañ;

beb gwech eta pa zebrom e gorv roet e sakrifis evidom,

e teu e nerz ennom,

ha pa evom e wad skuillet evidom, eo gwalhet on ene.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,

e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

AR GALON ZAKR

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

C'hwi 'zo fellet deoh, pa oa ho Mab karet stag ouz ar groaz,

e vefe toullet dezañ e gostez gand lañs eur zoudard:

evelse, euz e Galon digor, feunteun ho madeleziou,

e red warnom oll eur mor a hrasou hag a drugarez;

én e Galon Zakr, entanet a-viskoaz gand ar garantez evidom,

e kav an eneou fidel eul leh a ziskuiz,

hag ar re a geuz d'o fehejou eur porz a zilvidigez.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,

e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

AN AOTROU KRIST ROUE

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

C'hwi ho peus sakret ho Mab unganet, Or Zalver Jezuz Krist,
beleg da viken ha Roue ar bed:

evel beleg, e-noa d'en em ginnig e sakrifik war aoter ar groaz,
evid peurechui ober ho polontez ha prena an dud;

evel roue, goude beza laket da blega dezañ an oll draou krouet,
e-neus da lakaad etre ho taouarn, c'hwi an Doue braz-meurbed,
ar rouantelez n'eus fin ebed dezi,

hini ar wirionez hag ar vuez, hini ar hras hag ar zantelez,
hini ar justis, ar peoh hag ar garantez.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,

e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

AN EBESTEL

(diwar an diweza testenn latin)

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag c'hwi, ar Pastor a zo a viskoaz da virviken,
ne zilezit morse ho teñved,

med, dre an Ebestel venniget, n'ehanit ket d'o diwall,
evid ma vezint gouarnet atao

gand ar bastored laket ganeoh en c fenn
da zelher plas ho Mab war an douar.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,

e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

SANT JOZEF

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
hag en eur enori sant Jozef,
deoh eo atao e fell deom rei gloar ha mil bennoz.
Eñ a oa an den just, ho peus roet da bried d'ar Werhez Mamm da Zoue,
ar zervicher fur ha fidel, ho peus laket e penn ar Famill zantel,
evid diwall, gand karantez eun tad,
ho Mab unganet bet konsevet dre nerz ar Spered Santel,
Jezuz Krist, or Zalver.
Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou, en eur lavared a greiz kalon:

SANT YANN VADEZOUR

E gwirionez, just ha santel eo,
Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
ha kana meuleudi deoh evid ar grasou kaer
ho peus roet da zant Yann Vadezour:
Pa ne oa ket ganet c'hoaz, e-neus anavezet mouez Mamm Or Zalver,
ha tridet gand al levenez, evid diskouez euz ho perz
e oa erru silvidigez an dud.
Drezañ eo bet tennet diwar e vamm an dizenor da jom difrouez,
ha pa 'z eo bet ganet, e-neus laket teod e dad da ziluia.
N'eus nemetañ, e-touez an oll brofeted,
o veza embannet e oa da zond eur Zalver d'ar bed,
hag ouspenn-ze e ziskouezet d'an dud deut en o zouez.

Ha bet e-neus an enor da vadezi Mestr ar vadiziant,
diskennet er ster Jordan evid santellaad an dour
ha sila ennañ ar vertuz da rei deom santelez ha buez.
Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

DEDI EUN ILIZ

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
C'hwi a zeu da jom en ti a bedenn savet amañ gand on daouarn,
evid skuill gand largetez ho tonezonou;
ha muioh c'hoaz, emaoch o veva en Iliz savet ganeoh hoh-unan,
a labourit enni dalhmad da greski he santelez.
An Iliz-se - pobl ar gristenien -, setu an ti a bedenn gwirion,
kaerroh eged an ilizou a wel an daoualagad;
rag bez' eo an templ a zo ennañ splannder ho kloar,
kador ar wirionez, ha tan ar garantez.
An Iliz-se a zo ivez pried karet Or Zalver,
prenet gand priz e wad
ha karget a vuez gand e Spered Santel;
ha bez 'eo or mamm,
rag en he hreiz om bet ganet a-nevez dre ho kras,
enni e vezom maget gand ho komzou santel,
kreñveet gand sakramant ar bara a vuez,
konfortet gand sikouriou ho trugarez.
Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

SANTEZ ANNA

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag c'hwi ho peus roet da zantez Anna an enor kaer
da gaoud evid merh an Itron Varia, dinamm a behed, gwerhez heb par,

Mamm da Jezuz Krist, or Zalver;
ha d'ar Vretoned, ho pobl fidel,
ho peus roet da batronez Mamm goz ho Mab karet,
evid o divenn ha beilla warno bepred.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

AR ZENT

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag c'hwi 'zo kresket ho kloar gand boked ar Zent en ho paradoz,
ha pa gurunit o meritou, war ho tonezonou e lakit ar gurunenn.

C'hwi a ro deom en o buez skoueriou mad da heulia,
en o fedennou eur zikour evidom,

hag en unvaniez ganto ar joa da dañva an eürusted:
peadra deom, harpet gand testou ken niveruz troet o zellou warnom,
da zelher stard e stourmadou ar vuez,
ha da hounid evelo ar gurunenn a hloar na zivleunio biken,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou,
en eur lavared a greiz kalon:

AR ZANT A ZAVAS AN ESKOPTI


E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

C'hwi ho peus, en ho trugarez vraz,
galvet ahanom euz an deñvalijenn d'ar sklerijenn
hag on tennet a-zindan galloud an droug-spered
evid ober ahanom ho pugale.

Rag dre ho madelez eo, Aotrou Doue, ha gand sikour ho kras
e-neus an Eskob sant N... hadet ar feiz en on touez,
hag e-neus e labour douget frouez kaer
abalamour d'e veritou.

Ha bremañ, Tad santel, grit ma vo paduz kement vad ho peus grêt ennom,
ha mirit kristenien ar vro-mañ stard en o feiz:
santelleet er wirionez, unanet er garantez,
heñchit anezo beteg gloar ar baradoz,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou, en eur lavared a greiz kalon:



AR SKRITUR ZAKR EN OVERENN - Bloavez B (1969-1970)

SULVEZ Ia AN AZVENT

Lennadenn Ia. - An dud hirio koulz hag en amzer ar profed, a zav o mouez warzu Doue. Gwasket gand ar pehed, ar boan, an enkreuz, e pedont anezañ da zond: "A! ma tigorfeh an neñvou!"

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (63/16 - 64/8)

C'hwil, Aotrou Doue, a zo Tad deom;
Or Zalver eo hoh ano a viskoaz.
Perag, Aotrou, e lezit ahanom diañket pell diouzh,
e lezit or halonou kaledet, heb doujañs dech ?
Deut en-dro, abalamour d'ho servicherien, ha da rummadou ho pobl.

A! ma tigorfeh an neñvou ! ma karfeñ diskenn
ha lakad ar menezioù da blada dirazoh !
Diskennet oh bet, ha dirazoh ar menezioù 'zo bet teuzet evel ar hoar.
Skouarn ebed n'he deus klevet, lagad ebed n'e-neus gwelet
eun Doue all oh obet kement
evid an dud a lak o fizians ennañ.
Dond a rit daved an dud a vez reiz o buez,
ar re a vir ar zont ahanoh hag a heuil ho lezennou.
Hogen, setu e oa eet droug ennoh,
pa oam kouezet er pehed abaoe pell amzer;
penaoz e vefem salvet ?
Oll e oam deut da veza heñvel ouz tud lor,
on oberou gwella evel lienaj saotret;

Oll e oam dizehet, par d'an deliou a gouez euz ar gwez,
 hag or pehejou, par d'an aveliou, a skube ahanom.
 Dén ebed kén da bedi hoh ano, da staga e galon ouzoh en eur zihuni.
 Ha c'hwi ho poa kuzet ho tremm ouzom,
 lezet ahanom chadennet gand or pehejou.
 Ha koulskoude, Aotrou Doue, tad oh deom;
 ni 'zo ar pri, ha c'hwi ar poder:
 oll ez om bet stummet gand ho taouarn. - (Setu komzou Doue.)

/ SALM 79 / Diskan: Salver ar bed, a! diskennit, (Kantik n. 107)
 Euz ar pehed on dizammit;
 Diskennit euz ar baradoz,
 Emaom pell 'zo ouz ho kortoz.

1. Pastor pobl Israel, selaouit; c'hwi or pastor, diskouezit ho kloar;
 dihunt nerz ho kalloud, ha deut d'or zikour.
2. Aotrou Doue, troit ahanom war on tu mad;
 taolit warnom sklerijenn ho tal, hag e vezim salvet.
3. Doue ar bed a-béz, euz lein an neñv sellit;
 deut da weled ar winienn-mañ, bet plantet gand ho torn.
4. Harpit gand ho torn an dén ho peus dibabet, mab an dén kennerzet ganeoh;
 biken mui ne dehim pell diouzoh: digasit buez ennom, ha ni 'bedo hoh ano.

Eil Lennadenn.- "Emaom o hortoz ar Zalver da bara dirag on daoulagad."

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT. (2 Kor. 1/3-9)

Va breudeur, gras ha peoh warnoh
 digand Doue on Tad ha digand Or Zalver Jezuz Krist.
 Trugarekaad a ran Doue bepred abalamour deoh,
 evid gras Doue a zo bet roet deoh en Aotrou Krist.

Ennañ ez oh deut pinvidig e peb tra,
 gand teñzor komzou Doue hag an anaoudegez anezañ,
 pa'z eo bet sañket doun ennoh an testeni roet d'Or Zalver.
 Evelse, ne ra diouer deoh donezon speredel ebéd,
 en-dra ma hortozit Jezuz Krist, on Aotrou,

da bara dirag ho taoulagad:

Eñ a raio deoh derhel stard beteg penn,
 deoh da veza direbech pa erruo devez Jezuz Krist, on Aotrou.
 Derhel a ra d'e hér an Doue oh bet galvet gantañ
 da gaoud perz er vuez gand e Vab, Or Zalver Jezuz Krist.

- (Setu komzou Doue.)

ALLELUIA (bis).- Diskouezit deom ho madelez,
 ha digasit deom ar Zalver.- ALLELUIA.

Aviel war ar bajenn war-lerh.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT MARK (13/33-37)

"Chomit dihun, pa n'ouzoh ket peur e teuio mestr an ti."

En amzer-se, edo Jezuz o komz gand e ziskibien euz e zistro:

"Taolit evez, emezañ, ha chomit dihun,

rag n'ouzoh peur e vo deut ar mare.

Bez' e vo evel pa vez eun dén eet da bell bro,
kuiteet gantañ e di ha roet galloud d'e vevelien,
pep hini war e labour,

ha gourhemennet d'ar porzier chom da veilla.

Chomit dihun eta,

rag n'ouzoh ket pegoulz emañ mestr an ti da zond,

diouz an abardaez pe da hanter-noz,

da gan ar hillog pe diouz ar mintin.

Diwallit na zeufe a daol trumm, ha kaoud ahanoh kousket.

Ar pezh a lavaran deoh, a lavaran d'an oll: Chomit dihun !"

- Setu komzou Doue.-

+++++

ANTIFONENN AN DIGOR da Zulvez kenta an Azvent : Salm 24/1-3.

Diskan(1) Ton gand R. Abjean: Warzu ennoh e savan va ene;
Va oll fizians 'zo ennoh, va Doue.

Ton gand A. Sez nec: Warzu ennoh 'savan va halon;
o va Doue, ennoh hebkén am eus fizians.

- (1) On a corrigé le texte publié dans "Salmou nevez", où le 2e vers exprime du négatif: N'am bezo ket da gaoud méz... Ceci se retrouve dans les couplets, tandis que le "In te confido" a sa place dans le refrain.

EIL SULVEZ AN AZVENT Bloavez B.

Lennadenn Ia.- Dre vouez ar profed, e ro Doue frealz, hirio c'hoaz,
d'e bobl gwasket gand an droug:

"Digorit an hent d'an Aotrou, emañ o tond."

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (40/1-5, 9-11)

Roit kalon, digasit frealz d'am fobl, eme ho Toue,
komzit ouz kalon Jeruzalem ha lavarit dezi a vouez kreñv
ez eo echu he sujudigez ha gwalhet he fehed,
rag diwar dorn an Aotrou
he deus bet diou wech kastiz evid heh oll fehejou.

Mouez eun dén a glever o krial:

"A-dreuz an dezert, digorit an hent d'an Aotrou;
en douarou fraost, trohit eeun eur wenodenn d'on Doue.

Ra vo stañket peb traonienn, diskaret peb menez ha torgenn,
kompezet ar hribennou, ha plêneet an tarroziou.

Emañ gloar an Aotrou o vond da bara, hag an oll dud a welo,
rag dre hêncu an Aotrou ez eo bet lavaret."

Pignit war eur menez uhel, evid kas ar helou mad da Gêr-Zion;
savit ho mouez, ha kreñv, evid kas ar helou mad da Jeruzalem.
Ya, savit ho mouez heb aon, lavarit da gêriou Juda:

Setu ho Toue, setu an Aotrou Doue o tond e barr e nerz,
ha gand e vreh e vo an treh.

Emañ gopr e hounid ganta, ha frouez e dreh dirazan.

Par e vo d'ar pastor, a ziwall mad e zeñved,
a ra dezo, gand e vreh, chom bodet,- a zoug an oanigou e pleg e vantell,
hag a rén goustadig ar mammou denved.

(AZVENT II)

SALM 84.- Diskan: Distroït da rei deom buez,- Ho pobl ennoh 'no levenez;
 Diskouezit deom ho madelez,- Digasit ho silvidigez.

1. Selaou a rin petra 'lavarao Doue, an Aotrou:
 Ar peoh evid e bobl, setu e gomzou;
 Tost emañ ar zilvidigez d'an dud a zouj anezañ,
 E hloar a zeuio da jom war an douar.
2. Madelez ha gwirionez a ya an eil da gaoud ebén,
 justis ha peoh d'en em vriata;
 ar wirionez a ziwano euz an douar, hag euz an neñv e stouo ar justis.
3. An Aotrou a zigaso eürusted, hag an douar a zougo e frouez;
 ar justis a garzo en e raog, hag a zigoro hent d'ar zilvidigez.

Eil Lennadenn.- "Emaom o hortoz neñvou nevez hag eun douar nevez."

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PER - (3/8-14)-

Eun dra 'zo, va breudeur kër, hag a dleit soñjal ennañ:
 eun devez a zo, evid an Aotrou, evel eur bloavez,
 ha mil bloavez evel eun devez.

An Aotrou Doue ne ra ket dale gand e bromesa, evel ma lavar lod,
 med gouzoud a ra kemer amzer ganeoh,
 rag ne 'fell ket dezañ ez afe lod da goll,
 med e kemerfe an oll hent ar binijenn.

Evelato, dond a ray dervez an Aotrou evel eul laer,
 pa yelo an neñvou da get en eur strakal, e vruzuno ar stered entanet,
 hag e tevo an douar ha kement tra 'zo ennañ.

Neuze 'ta, pa'z eo toñket d'an oll draou-se teuzi evelse,
na peseurt tud e tleit beza, dre zantelez ho puez hag ho toujañs Doue,
epad m'emaoh, mall ganeoh, o hortoz an donedigez,
hini dervez an Aotrou, a lako an neñvou entanet da vruzuna

hag ar stered da deuzi gand ar wréz (pe: ar gor).

Ya 'vad, ha neñvou nevez, eun douar nevez ive
a hortozom hervez e bromesa; eno e vo bro ar justis peurvad.
Rag-se, va breudeur kër, en eur hortoz kement-se,
grit euz ho kwella evid m'ho kavo Or Zalver
dibehed ha direbech er peoh.

ALLELUIA (bis)- Digorit an hent d'An Aotrou,
hag e welo peb dén silvidigez Doue. - ALLELUIA.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT MARK -(1/1-8)


Amañ e tigor Kelou Mad Jezuz Krist, Mab da Zoue.
Hervez ar pezh 'zo skrivet e levr ar profed Izaïaz:

"Setu e kasan va hannad en da raog: eñ a gempenno did an hent.

Mouez eun dén o krial en dezert: Kempennit an hent d'an Aotrou,
eeunit dezañ e wenodennou",

evelse e voe gwelet Yann ar Badezour en dezert,
o prezeg eur vadiziant a binijenn evid kaoud ar pardon euz ar pehejou.
Diredeg a ree davetañ bro Judea a-bez hag oll dud Jeruzalem:
oh añaao o fehejou, e vezent badezet gantañ er ster Yordan.
Yann a oa gantañ dillad reun kañval, hag eur gouriz lèr en-dro d'e zargreiz;
e voued a oa killeien-raden ha mél gouez.

En e brezeg e lavare: "Emañ o tond war va lerh an hini 'zo kreñvoh egedon,
ha n'on ket din zokén, en eur blega, da ziskoulma lèrenn e voutou.
Me am eus badezet ahanoh en dour, eñ ho padezo er Spered Santel."



OVERENN HANTER-NOZI.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (9/1-6) - Ar Zalver a vo Roue ar peoh.

Ar bobl a gerze en deñvalijenn he deus gwelet eur sklerijenn vraz;

an dud a oa o chom er vro deñval a zo paret an deiz warno.

Kresket ho peus al levenez, joa vraz ho peus skuillet.

Emaint o tridal dirazoh gand levenez,

evel an eosterien pa vez echu an eost,

evel ar zoudarded eet an treh ganto, pa rannont etrezo ar preiz dastumet.

Rag ar yeo a boueze war o choug, ar vaz a vloñse o diouiskoaz,

ar wialenn a skoe ganto evid o bounta d'al labour,

kement-se ho peus torret, evel d'an deiz ma oa bet trehet Madian.

Ar boutou pounner a lake an douar da dregerni,

ar mantilli ruziet gand gwad,

setu int devet, loñket gand an tan.

Ya! pegwir eur hrouadur a zo ganet evidom,

eur mab 'zo roet deom;

merk e halloud war e skoaz, evel-henn e vo anvet:

Kuzulier burzuduz, Doue kreñv,

Tad da viken, Roue ar peoh.

War astenn ez aio e halloud, ha ne vo fin ebéd kén d'ar peoh

war gador David hag en e rouantelez.

Stard e vo harpet war ar gwir hag ar justis, a vremañ da virviken.

Setu petra 'vo grêt gand karantez entanet an Aotrou, mestr ar bed.

+++++

SALM 95.- Diskan: Eur hrouadur, Mab karet an Tad, (Ton gand A. Seznec)
War an douar, 'vidom-ni hirio 'zo ganet.

pe: Eur Zalver hirio 'zo ganet deom: an Aotrou Krist eo.

1. Savit d'an Aotrou Doue eur han nevez,
Meulit an Aotrou dre bevar horn ar bed,
Roit meuleudi d'an Aotrou ha mil bennoz d'e ano.
2. Bemdez, roit da anaoud e zilvidigez,
Grit brud d'e hloar etouez broadou an douar,
D'an oll boblou displegit e vurzudou.
3. Ra vo laouen an neñvou, ra drido kalon an douar,
ra zavo trouz ar mor gand kement tra 'zo ennañ,
ra vo beuzet ar mêziou e-kreiz an dudi.
4. Ra hejo gand ar joa skourrou gwez ar hoajou,
o weled an Aotrou a zo o tond,
rag dond a ra evid lakad an douar dindan e halloud.

Eil Lennadenn.- PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DITIZ. (2/11-14)

Gras madelezuz Doue a zo deut er sklerijenn,
karget a zilvidigez evid an oll dud.

Deski a ra deom trei kein d'ar pehed ha da hoantegeziou ar bed,
evid beva war an douar-mañ hervez ar furnez, ar justis

hag an doujañs da Zoue,

en eur hortoz an eürusted a esperom
ha donedigez leun a hloar Jezuz Krist, on Doue braz hag or Zalver.
Eñ e-neus en em roet evidom, evid or prena euz peb pehed
hag on lakad glan, evid beza e bobl karet, douget d'an oberou mad.

ALLELUIA (bis).- Kelou laouen a zigasan deoh:
 Hirio 'z eus ganet deoh eur Zalver,
 An Aotrou Krist eo ar bugel-se. - ALLELUIA.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ. (2/1-14)

En amzer-se, e oa deut urz a-berz an impalaer Aogust da niveri oll dud ar bed. An niveradur kenta-se a voe grêt pa oa Kiriniuz gouarnour Bro-Siria. Mond a ree an dud da rei o ano, pep hini en e gêr.

Jozef ive, euz Nazared e Bro-Halilea, a oa pignet da Vro-Judea, beteg kêr David, anvet Betleem, pegwir e oa euz ti ha famill David, evid rei e ano, gand Mari, e bried, a oa dougerez.

Epad m'edont eno, setu deut an amzer dezi da henel he bugel. He Mab kenta-ganet he deus neuze laket er bed, mailluret ha laket da hourvez en eur hraou, dre ma ne oa ket a blaz evito en ostaleri.

Pastored a oa er mêziou tro-war-dro, o veilla 'hed an noz da ziwall o deñved. Ha setu eun El a-berz Doue en em ziskouez dezo, ha gloar Doue a daol sklerijenn en-dro dezo, hag int da veza spontet.

An El a lavar dezo: "Chomit heb aon, rag kelou a zigasan deoh euz eul levenez vraz, a vo evid ar bobl a-bez: eur Zalver a zo ganet deoh hirio e kêr David; ar Mesiaz eo, an Aotrou. Ha setu ar merk a raio deoh e anaoud: c'hwi 'gavo eur hrouadurig mailluret ha gourvezet en eur hraou."

Ha neuze, en eun taol, e teu da heul an El eun niver braz a Eled euz an neñv, oll o veuli Doue en eur lavared: "Gloar da Zoue e barr an neñvou, ha peoh war an douar d'an dud a blij dezañ."

OVERENN GOULOU-DEIZI.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (62/11-12) - Setu ho Salver o tond.-

Selaouit ar gomz a gas an Aotrou beteg pennou pella ar bed:

"Lavarit d'ar verh Sion: Setu ho Salver o tond;

setu d'e heul frouez an treh e-neus gonezet,

ha dirazañ ar madou e-neus dastumet d'e breiz.

C'hwi vo anvet: Pobl santel,

ar re brenet gand an Aotrou;

ha te, kêr Sion, a vo anvet: "an hini c'hoanteet",

"ar gêr n'eo mui dilezet".

+++++

SALM 96.- Diskan: Sklerijenn splann hirio a bar warnom:

..... Eur Zalver evidom a zo ganet.

1. D'an Aotrou eo ar rouantelez! (pe: Roue eo an Aotrou!)
Ra drido kalon an douar! Levenez d'an inizi pella!
2. Moueziou an neñv a embann santelez Doue,
hag an oll boblou a dro o zellou da weled e hloar.
3. Savet eo ar sklerijenn evid an dén just,
hag al levenez evid an dén 'zo eeun e galon.
4. Bezit laouen, tud just, abalamour d'an Aotrou;
kanit meuleudi ha trugarez d'e ano santel.

+++++

Eil Lennadenn.- PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DITIZ. (3/4-7)

Va mab k  r, setu diskouezet dirazom madelez Doue or Zalver hag e garantez ouz an dud. N'eo ket evid talvoudegez an oberou mad gr  t ganeom, med abalamour d'e drugarez e-neus or zaveteet.

Or gwelhet e-neus dre zakramant an dour, ar vadiziant, a ra ahanom bugale da Zoue hag a zigas ennom gras ar Spered Santel.

Ya, skuillet e-neus ennom e Spered, dre Jezuz Krist, or Zalver, evid ma vezim santelleet dre e hras, ha ma vezim, hervez an esperan  s, heritourien d'ar vuez peurbaduz, en Or Zalver Jezuz Krist.

ALLELUIA.(bis) - Gloar da Zoue e barr an ne  vou,
ha peoh war an douar d'an dud a blij deza  n.- ALLELUIA.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ. (2/15-20)

Goude ma oa tehet an Elez diwar o zro, ar bastored a gomze etrezo:
"Deom beteg Betleem, da weled ar pez a zo c'hoarvezet, ar pez a zo bet diskleriet deom gand an Aotrou." Mond a reont buan, hag e kavont Mari ha Jozef, gand ar hrouadur gourvezet er hraou.

Goude beza gwelet, e reont da houzoud ar pez a oa bet lavaret dezo diwarbenn ar hrouadur-se. Ha kement hini a gleva a oa souezet gand ar pez a gonte dezo ar bastored.

Mari a zalhe mad an oll draou-se en he halon, hag a zo  je enno. Hag ar bastored, en eur vond kuit, a rente gloar ha meuleudi da Zoue, evid kement o doa gwelet ha klevet, hervez ma oa bet lavaret dezo.

I.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS. (52/7-10) - Ar helou mad.

Pegen kaer eo gweled o redeg war ar menezioù
ar hannad a zoug kelou ar peoh,

paotr ar helou mad, a embann kelou ar zilvidigez,
hag a zeu da lavared d'ar gêr zantel: "Roue eo ho Toue!"

Klevit mouez ar hedourien war beg an tour:
sevel a reont o mouez, oll a-unan e krient laouen,
rag o daoulagad a wel an Aotrou o tistrei da gêr Sion.
Bezit laouen, ha kanit ho plijadur, c'hwi Jeruzalem ar gêr diskaret,
rag an Aotrou a gemer truez ouz e bobl, dasprena 'ra Jeruzalem.
Diskouezet e-neus an Aotrou nerz e vreh santel a-wel d'an oll boblou.
Euz an eil penn d'egile d'an douar, e welo an dud silvidigez on Doue.

SALM 97.- Diskan: An douar a-bez e-neus gwelet
..... ar Zalver roet deom gand Doue.

1. Savit d'an Aotrou eur han nevez,
rag burzudou dispar e-neus grêt.
2. An Aotrou e-neus roet da anaoud e zilvidigez,
a-wel da vroadou an douar e-neus diskouezet e justis.
3. Dalhet e-neus soñj euz e vadelez e-keñver Israel
hag euz gwirionez e bromesa.
4. Beteg pennou pella an douar
eo bet gwelet silvidigez on Doue.
5. Savit ho mouez en enor d'an Aotrou, oll boblou ar bed,
bezit laouen ha kanit a wir galon.
6. Sonit en enor d'an Aotrou war an delenn,
kanit a vouez uhel dirag an Aotrou, ar roue!

OVERENN AN DEIZ DA NEDELEG

Eil Lennadenn.- PENNAD KENTA EUZ AL LIZER D'AN HEBREED. (1/1-6)

Meur a wech hag e meur a hiz e-noa Doue, gwechall, komzet ouz on tadou dre ar brofeted. En amzer diweza, e-neus komzet deom dre e Vab. Hemañ eo e-neus lakeet da heritour war beb tra, ha drezañ eo e-neus krouet ar bed.

Ar Mab-se, ar sked euz e hloar, heñvel outañ dre natur, a zoug peb tra krouet dre nerz e gomz. Goude beza gwalhet ar pehejou, emañ azezet en neñv a-zeou d'an Doue uhel-mourbed. Kement eo savet dreist an Elez, evel m'e-neus bet digand e Dad eun ano kalz uhelloc'h eged o hini.

Rag da behini euz an Elez e-neus Doue lavaret biskoaz: "C'hwi zo va Mab, hirio ez oh ganet ganin"? Ha c'hoaz: "Me 'vo dezañ da Dad, hag eñ a vo din da Vab". Ha pa zigas e Vab unganet er bed, e lavar: "Ra stouo d'e adori oll Elez Doue".

ALLELUIA.(bis).- Eun deiz santel a bar warnom;
poblou ar bed, deuit d'adori an Aotrou.
Eur sklerijenn vraz hirio
'zo diskennet war an douar.- ALLELUIA.

PENNAD KENTA AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN. (1/1-18)

- E leh "ar Gomz", e heller
lavared "ar Verb". -

Er penn kenta edo ar Gomz, hag ar Gomz a oa gand Doue,
hag ar Gomz a oa Doue. Er penn kenta edo gand Doue.
Drezañ eo bet grêt peb tra, hag hebdañ n'eus bet grêt netra.
Kement a zo bet grêt ennañ a oa buez, hag ar vuez 'oa sklerijenn an dud.
Ar sklerijenn a lugern e-kreiz an deñvalijenn,
hag an deñvalijenn n'he deus ket harzet outi.
Bez' ez eus bet eun den digaset gand Doue, a oa Yann e ano.
Deut e oa evid beza test, evid rei testeni d'ar sklerijenn,

evid dougen an oll da gredi drezañ.

Ne oa ket hennez ar sklerijenn, med evid rei testeni d'ar sklerijenn e oa.

Ar Gomz a oa ar sklerijenn wirion, a bar war beb den en eur zond er bed.

Bez' e oa er bed, hag ar bed 'zo bet grêt gantañ,

ha n'eo ket bet anavezet gand ar bed.

Deut eo etouez e dud, hag e dud n'o deus ket grêt digemer dezañ.

Med d'ar re o deus e zigemeret, d'ar re a gred en e ano,

e-neus roet galloud da veza bugale da Zoue;

ar re-ze n'int ket ganet euz ar gwad, na diwar youl ar hôrv,

na diwar bolontez mab-dén, med euz Doue eo int ganet.

Hag ar Gomz a zo deuet da veza dén, ha deut eo da jom en on touez.

Ha ni on eus gwelet e hloar, an hini a zo dezañ evel Mab unganet an Tad,

leun a hras hag a wirionez.

(Amañ e heller krenna al lennadenn.)

Yann Vadezour a zoug testeni diwar e benn hag a lavar a vouez kreñv:

"Hemañ eo an hini a lavaren: An hini a zo o tond war va lerh a zo bremañ dirazon, rag bez' e oa anezañ araozon."

Ni on eus bet oll euz e leunder, ha gras goude gras.

Al Lezenn a oa bet roet dre Voizez,

med ar hras hag ar wirionez a zo deut dre Jezuz Krist.

Dén ebéd n'e-neus gwelet Doue biskoaz,

ar Mab unganet, hag a zo e kalon an Tad, e-neus roet anezañ da anaoud.
